

61
283

CANTIQ

VOAR BUEZ SANT ERVOAN.

Selaouet oll quitibunan
Buez an Autrou Sant Ervoan,
Buez Sant Ervoan Heloury ;
Disquet-hi oll, me o suppli.

Ganet eo bet dre c'haç divin
Er Maner deus a Guervarzin,
En quichen ar guær a Dreguer,
Voar dro eur c'hart leõ dious kær.

He dad voa hañvet Heloury,
Hac e vam Asor ar Plessy,
Tud pinviq hac a galite,
Hac o devoa doujanç Doue.

Quent evit ma vije ganet,
D'he vam Asor voe revelet
Penaus ar buguel a dougue
A vije eur Sant bras un de.

Pa voe ganet, na voe quet pell
Na eure guelet, en buguel,
E voa d'ar vertuz destinet,
O vezan douç, humbl ha parfet.

He dad ac e vam, hep dale,
Eo discas da garet Doue,
Hac a roas eur mæstr dezan
D'en disquin da len ha scrivan.

Goude, e sanchont d'o buguel
Eur breceptor fur ha santel,
Pehini a discas buhan
Al latin d'o mabic Ervoan.

Profitan a re assambles
En study hac en santelez,
Bepret ous en em occupin
O studian hac o pidin.

Pa voa a bevarzec bloas oaget,
Da Baris a c'hoantas monet,
Dre ma cleve e voa enno
E fleurisse a squiencho.

Er guær-man e eure guelet
He santelez hac he speret ;
He speret caër o surpassi
Ar re voa gantan er study.

Græt gantan he philosophi,
E tiscas an theologi ;
Goude-se c'hoas ar guir-canon
A ziscas en perfection.

Ober a re guelet ive
Ar santelez deus e vue ;
Ne zebre tam bara guinis,
Mæs bara heyz, pe bara gris.

Ar c'hiç, an uou, ar pesquet
A ve voar he daul servichet,
A zistribue pervuan
D'ar bevien yac'h ha d'ar re glan.

Pa voa pevar bloas voarnuguent,
Savant bras ha leun a squient,
Ec'h æs c'hoas, 'vit en em avanç,
Deus a Baris da Orleans.

Enon, gant un doctor habil,
E tiscas c'hoas ar guir civil
Evit jujin, gant justiç vad,
Pep sort proces ha pep debat.

Er guær-man e renonças crenn
D'ar c'hiç, d'ar guin evit biquen,
Hac a consacras e vue
Da servijin parfæt Doue.

Ar breviael a recite
Hac offiç ar Verc'hes bemde ;
Ouspen, yun a re pep guener,
En honor da varo hon Salver.

Gout a re penaus ar squient
Na hell quet rentan an dud sænt,
Ma na unissont assambles
An œuvrou mad gant o furnez.

He study gantan achuet,
Da official voe lequeet,
Da varner ilis eu Raon,
Gant Mauriç an Arreagon.

Escop Treguer, neubent goude,
Informet deus a he vue,
En pedas da zont davetan
Dre un istim bras evitan.

Ar Sant, dre humilite vras
D'he escop a obeissas,
Recev a ræs gant santelez
An urz sacr a veleguiez.

An escop en eure ractal
Barner, ilis, official,
A ro dezan incontinent
Parous Tredrez a voa vacant.

Un neubent goude quement-man,
E roas Louanec dezan,
Dre ma voa eur barous carguet
A viçou fal, tud direglet.

Mæs Sant Ervoan, gant fervous bras,
Ar bopl paour-man a instruas ;
O preseq, o catechisan,
E chanchas crenn ar barous-man.

Pa voa barner, ec'h angaje
Lies a vech, dre charite,
Ar bartiou da accordin,
Da chom en peuc'h, hac hep plædin.

Ha pa renque rein eur setañ,
En roe just, en conscianç ;
Jujin a re herve Doue,
Hep egard da nep qualite.

N'en de quet hepquen da jugin,
Mæs dont a re c'hoas da blædin
Evit ar paour, en donæson,
Bars en pep jurisdiction.

Ma care'r justiç so breman
Ober evel ar barner-man,
Ve quet quellies commettet
A injustiç hac a bec'het.

Mar boa parfæt den a justiç,
Parfæt oa c'hoas den a ilis ;
Na glasque nemert gloar Doue,
Ha disquin d'an oll hent an ée.

Lies a vech e presegue
Peder veach er memes de,
Ha seiz guech, eur Guener-ar-Groas,
Ar Bassion a presegas.

N'en de quet hepquen da breseq
En Tredrez hac en Louanec,
Mæs er paroujou all voar-dro,
Ha dre Vreis en escoptyo.

Graç Doue, dre he sarmoniou,
A douche an oll calonou,
Ar re d'ar bec'herien brassan
Donet d'en em gonvertissan.

O vont da breseq, e cavas
Eur pont goloet gant dour bras;
Mæs an dour a arretas crenn,
Evit en lesel da dremen.

Quer bras voa e devotion
Ma fonte casi he galon
En he oræson en ilis,
Ha pa offre ar sacrific.

Glebian re lies he dillad
Gant an daërou'n daoulagad,
Pa zeue d'en em breparin
Quent evit dont da celebrin.

Eur vech, en pad he oferen,
E voe guelet a us d'he ben
Eur flammen dimeus an envou,
Queit a ma voa er goureou.

He dy a voa ty ar bevien ;
Deut mad a voant : hep refus den,
O lojan re hac o guisqin,
Ha rein deze boëd da dibrin.

Eur veach roet d'ar bevien
He oll ed hep menel greunen,
Dre eur miracl, en em gavas
He c'brignel leun eus a ed craz.

Eur veach all c'hoas n'en defoa
Nemert eur guennegad bara,
Hac en dont d'en distribuin,
Hep miret un tam da zibrin.

Chom a eure bara gantan,
Quement evel quent, da droc'han,
Goude bezan rassasiet
Cals a beaurien affamet.

Chanjet, tud avaricius,
Beet ous ar paour truezus ;
Guelet pegument ez eo mad
Doue ous an dud charitabl.

En voa tad an orphelinet,
Protectour an intanveset,
Souten an oll dud, zomus,
Ha confort ar re hirvoudus.

Mad vo ar Sant ous peb unan,
Nemert ous e gorf e-unan ;
En cas a re hac en træti
Evel he vrassan ennemi.

Eur rochet a reun a dougue
Voar he gorf santel nos a de ;
He vele eur gleud quevoeet,
Hac ar Bibl sacr voa e bluec.

Bemde en em ziscipline,
Ha casi bemde a yune,
Na deue da dibrin jamæs
Bara guen, na quig, na frouëz.

Erfin ar Sant so decedet,
Pa voa hanter-cant bloas oaget ;
Glac'haret bras voe tud ar vro,
Pa voe clevet e voa maro.

Quement a bopl a visite
Ar c'horf dimeus an den Doue,
Ma chomas tri de exposet
Hep gallout bezan interret.

Marvet eo bet en Kervarzin
Ar Sant leun a c'hraçou divin,
Er c'hathedral voe interret
He gorf santel gant pep respet.

Er bloavez tri ha trizec cant
Eo bet decedet ar Sant,
Dre he viraclou eo bet
Neubeut goude canoniset.

Pobl a Tredrez a Louanec,
Beet devot d'ho person bepret ;
En envou eman o pidi
Evidoc'h hac an escopty.

Autrou Sant ERVOAN biniguet,
So en ée a c'hloar curunet,
Pliget guenac'h hon preservi
Dious pep drouq ha pep annui.

Obtenet dimp digant Doue
He doujanç hac e garante,
Ar c'hraç d'en servijin er vad,
Da gavet oll eur maro mad. — Amen.